

KANTIK DA ZANTEZ BARBA

Diskan:- Meulomp holl gant joa  
 Meulomp Santez Barba.

- 1:- Ar Zantez-ma zo penherez.  
 Leun a vadou, leun a zanvez  
 Mez he zad'a zo eur païen  
 Enebour braz da gristenien.
- 2:- En he balez an idolou  
 A reseve kalz enoriou  
 Mez gant Doue sklerijennet  
 Barba d'ezo n'e zonje ket.
- 3:- En despet d'he zad kounahet  
 Ar verc'h yaouank zo badezet  
 Tridal a rà en he frizon  
 Sder hag eurus he c'halon.
- 4:- Diskar a ra an idolou  
 Ho bruzuna gant he boutou  
 Ra vezoc'h dre holl distrujet  
 Ha gant holl dud disprijet.
- 5:- Santez Barba dirak Doue  
 Bezit sonj eus ha pugale  
 Diouz ar gurun hon dioualit  
 Diouz en tan, ar maro subit.

